



Sioul eo ar mor

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

Adalek ar RG en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

merzout an egor, adwelout anvioù dilhad, al livioù, gerioù implijet evit komz deus an amzer

Doare dra c'hoari

Ur c'helc'hiad a c'hoarieren azezet, ar penn c'hoarier e kreiz

Evezhiadenn

Pe emañ pep c'hoarier ar c'helc'hiad azezet war ur gador pe e vez merket resis pep plas war ar c'helc'h

Pal ar c'hoari

Evit ar c'hoarier a zo e-kreiz (ar penn c'hoarier e penn kentañ) kavout ur plas, evit ar re all, cheñch plas

Mont en-dro ar c'hoari

Ar c'hoarier a zo e-kreiz a gont un istor en ur vrañsigellat evel ma vije war ur vag : « sioul eo ar mor, sioul eo ar mor, gervel a ran, war ar vag, an holl re o deus glas war o botoù ».

ar re-se o deus da sevel ha tapout krog en dargreiz ar c'hoarier 'zo dirazo ha jestraouiñ eveltañ.

Kenderc'hel a ra ar penn c'hoarier : « Avel 'zo, avel 'zo, gervel a ran war ar vag an holl re o deus ur stammenn ruz »

Kenderc'hel a ra c'hoazh en ur vrañsigellat muioc'h-mui

Pa vez lavaret gantañ : « dirollet eo ar mor », e klask an holl c'hoarieren a oa war ar vag ur plas dieub , an hini n'eo ket bet prim a-walc'h, pe a goll ur poent pe a zeu da vezañ penn-c'hoarier d'e dro.